

AR G'HA VEL

159

WAR DON : « Ar gear a Is ».



D'AR CH'ANER LEONIK AR BOUCHER.

(Dirag eur gavel, kaved enn eur park, empad distro ar Marn.)

O kavelig, lived enn glaz,
Penez, ama, war hent al lâz,
Ez kavan, muntred ha dirol,
'Vel eur vagik ô vont da gôl ?

Ar babik koant a peuz doughet
Lâr-d'in pelec'h é ma kuzet,
Da vabik koant zô, marteze,
Brema, treujet gant eur c'hlezé ?

Te oa pented a vokejou,
Ha striduz a ganouennou,
Eur vamm dener, gant bleuniou gwen,
Devoa great d'id eur gurunen.

O kavelig, lived enn glaz,
Losked war livgnen ann hent braz,
Ama ne man ken da vugel :
Hennez zo lac'hed er brezel !

Eunn El benag a zeui, eunn dé,
Da gaz c'hanout — diwar ar bé
Da vabik koant a peuz doughet, —
Trezeg Doué leunn a wened !

Lived enn aour gant ann Elé,
Te vô, neuze, eur c'har nevé,
Dirag ar Werc'hez, deiz ha nôz,
Er parkéier ar Baradoz ! . .

JOSEF IAKOB.